

# Lodenn III-an difenn hag ar peoc'h

## ABU/ONU: UN AOZADUR ETREVDRODEL POUEZUS

-Sinet e oa bet **Karta ar Broadoù Unanet** get 51 Stad, e San Francisco, d'ar 26 aviz Even **1945**. Testenn ganedigezh ONU eo. Lakaet e voe ar sez e **New-York**.

Hiziv-an-deiz ez eus **193 Stad**.

Digor eo da rac'h, troet eo ONU ar **gwarez ar peoc'h hag ar surentez etrevroadel hag ivez ar c'henlabourerezh ekonomikel ha sokial**.

### -Palioù an ABU :Karta an ABU e 1945


- Harpiñ ar peoc'h er bed en ur zoujiñ doc'h gwirioù ar pobloù
- Gwareziñ ar surentez etrevroadel
- Lakaat ur c'henlabourerezh etrevroadel ar dachenn ekonomikel ha sokial ha mab-den
- Doujiñ doc'h gwirioù mab-den

### -Mont en-dro an ONU

Kemer a ra an **Emvod Meur** divizoù ar peoc'h hag ar surentez etrevroadel, asantiñ izili nevez ha goulennoù ar budjed.

Er **C'huzul Surentez** ez eus 5 stad ezel-pad : **Sina, SUA, Rusia, Frañs hag ar Rouantelezh Unanet** get **ar gwir veto**. Diviz a ra an obererezhioù da sevel a-benn gwareziñ ar peoc'h, votiñ an divizoù evit kastiziñ pe gas ar soudarded o zokarnoù glas. Sekretour meur an ONU a zo **Ban Ki -Moon**.

## Tem I: klask ar peoc'h, surentez hag ar c'henober etrevroadel



An ostilh efedusañ evit gwareziñ ar peoc'h gant an ONU eo **ar soudarded o zokarnoù glas**. Hiziv-an-deiz 90 000 soudard ez eus e-barzh 16 rannvro ag ar bed. Lec'hiet int e-barzh **zonennoù dañjerusañ ha distabilañ** er bed evit gwareziñ ar peoc'h ha lakaat da vout doujet an arsav-brezel. E kerz an ONU int hag e teuant a 97 Stad er bed

## II. GWAREZIÑ AR PEOC'H ER BED

### Mission des Nations unies pour la stabilisation en Haïti (MINUSTAH)

Lec'hiet eo Haïti er mor Karaibez war un enezenn troc'het e daou etre Haïti ha Republik Dominik. Ar MINUSTAH (Mission des Nations Unies pour la Stabilisation en Haïti) a zo bet staliet da gentañ e 2004

D'an 12 a viz genver 2010 ez ues bet ur c'hren-douar bras, lazhus-tre get muioc'h evit 220 000 a dud marv ha 300 000 gloazet.

Ar c'hren-douar bras-mañ, hini krenvañ abaoe 200 vlez, en deus distrujet annezioù a muioc'h evit 1,5 milion a dud, hag en deus savet un enkadenn dengar pennañ.

Roll ar soudarded o zokarnoù glas e Haïti a zo :

- Reneveziñ un aergelc'h sur ha stabil ;
- Sikour argerzh politikel e pleustr ;
- Kreñvaat an ensavadurioù gouarnamantel ha frammoù ur stad a wir ;
- Kas war-raok ha gwareziñ ar gwirioù Mab-den e Haïti.

### Force intérimaire des Nations Unies au Liban (FINUL)

### Mission de l'Organisation des Nations unies en République démocratique du Congo (MONUSCO)

### Mission d'administration intérimaire des Nations Unies au Kosovo (MINUK)

## III. DIFENN AR GWIRIOÙ MAB-DEN ER BED

LEZ KASTIZEL ETREVROADEL EVIT AN EZ-YOUGOSLAVIA (TPIY) savet e 1993 evit barniñ an dud hag a vehe kablus da dorfedoù e-pad ar brezel Yougoslavia e 1993.

E **Den Haag (La Haye)** e lzelvroioù emañ

**3 fal pennañ:**

- barniñ ar re giriek a dorfedoù enep-mab-den jahinerezh, gwallidigezh, sklaverezh pe distruj madoù
  - roiñ ar justis evit miliadoù a familhoù
  - sevel ur peoc'h padus e ez-Yougoslavia
- El lez-kastiz etrevroadel-mañ eo bet kondaonet 64 den hag unan kaset en toull-bac'h a vuhez-pad (Stanislas Galic e anv).

### LEZ KASTIZEL ETREVROADEL EVIT AR RWANDA (TPIR)

Gouennlazh, torfedoù enep mab-den ha torfedoù brezel enep d'ar siviled tutsi e 1994

## III. AN AOZADURIOÙ ISPISIALIZET EVIT UR BED KENSKOAZELLOC'H

Ar WFP (PAM) Ar World Food Programm,

ar PAM a zo ar « Programme Alimentaire Mondial » hag e brezhoneg ar Programm Boued er Bed. Al lodenn aozadur a-enep an naonegezh eus an DNU eo. Brasañ ajañs stourm a-enep an naonegezh er bed eo.

Palioù pennañ o deus:

-saveteiñ buhezoù ha gwareziñ ar sikourioù e darvoudoù mallus.

-talañ ouzh an naonegezh ha difenn ouzh gwallreuzioù.

-bihanaat ar baourentez.

-digreskiñ ar wallvagadur hag an isvagadur (ket a walc'h a boued)

-krenvaat barregezhioù ar vro da zigreskiñ an naonegezh gant programmoù ha prenadurioù boued.

Dreist-holl e labour an aozadur pa vez darvoudoù mallus. Troet eo an obererezhioù a tu ar vugale hag ar vaouezed.

80 milion a dud a zo sikouret gant ar WFP pep blez e-barzh 75 stad.



**HNCR** :Agence des Nations Unies pour les réfugiés (**Aozadur etevroadel evit ar repuidi**)

-gwareziñ ar repuidi er bed a-bezh, difenn o gwirioù hag

Krouet eo e 1950.

Hiziv-an-deiz ez eus 9 300 den dasparzhet e 125 stad a zalc'h da sikour 33,9 million a dud.

## Tem 2: an difenn broadel e Frañs hag e gefridioù

